

HARLU DU 1943  
(darn)

PILTROTAT raent en he zro,  
O feultrin ront en a-roak ganto.  
Unan a oa kamm  
E gile yaouank flamm  
Hag e roe ar vorianez  
D'ar golvaned divezh  
En amzer a gernezh  
He zeñzor priziusañ :  
Tammoù bara.

E petra e sonje-hi,  
Ar vorianez pell diouzh he zi ?  
Daoust hag e wele dirak he sell  
Heol lorc'hus ar broioù pell  
Peotramant  
Melezour glas ar mor divent  
Ha warnañ ur vatimant  
O vont 'trezek ar mervent ?

Daoust hag e kleve-hi  
Ar palmez bras o sarac'hiñ,  
Dindan an oabl skedus,  
An avel o c'hoari 'n o delioù  
Ur c'had o tremen e-biou

Louis-Ferdinand Andouard est né à Binic le 16 juin 1904. Il a surtout collaboré à *Gwalarn*. Ses pseudonymes les plus connus sont Erel Keralban, Farnachanavan et Aberhel. C'est de ce nom qu'il a signé *Harlu du 1943* dans *Al Liamm*.

EXIL NOIR 1943  
(fragment)

ILS sautillaient tout autour d'elle,  
Leurs poitrines rondes en avant.  
L'un était boiteux  
Son compagnon était tout jeune  
Et la négresse donnait  
Aux moineaux effrontés  
En ce temps de famine  
Son trésor le plus précieux :  
Des morceaux de pain.

A quoi pensait-elle donc,  
La négresse loin de chez elle  
Voyait-elle devant ses yeux  
Le soleil orgueilleux des pays lointains  
Ou bien encore  
Le miroir bleu de l'immense océan  
Où passe un navire  
Qui navigue vers le sud-ouest ?

Entendait-elle  
Le bruissement des grands palmiers,  
Sous le ciel éclatant,  
Le vent qui joue dans les feuilles,  
Le passage d'un lièvre, tout près,